


# JÉAN-MARIE CAËR

Lac'het pevar den ganthan  
Laket an tan var tri anezho, a gret laeronsiou bras

*E parosiou Lanhouarneau a Plounéventer*

BARNET D'AR MARO EN KEMPER, D'AR BEMP A VIZ DU 1899



VAR EUN TON TRIST

1

Me o suppli, Drindet santel,  
Da zellaou peden ho pugael,  
Da rei sklerijen d'am speret  
Da ziscleria d'ar Vretonet,

2

Da ziscleria, e berr gomzou,  
Oll sirkonstansou a grimou,  
Pere so kometet sioas  
Gant eur muntrer, un tirant bras.

3

Va speret a zo oll troublet  
Kompen c'halfe tud badezet  
Ober krimou vel ar reman,  
Ep ma teu douar do tonka.

4

A wir galon t'ha me o ped,  
Zellaouit mar plich, Bretonet,  
Krimou ken horrubl pere so  
Nevez kometet en hor bro.

5

Bars e pares Lanhouarno,  
Tre Lesneven a Landivicho,  
En arrondissamant Montroulez,  
Eo kometet ar vuntrerez.

6

Bars er blavez trivac'h kanvet,  
Ag o ren neuze, Bretonet,  
Naontek pevar uguent ouspen,  
Vit rei skler d'an oll da gompren.

7

En dregont eus a viz ebrel,  
Jean-Marie Caër, barbar kruel,  
Da Velin-Soul a so bet ett,  
Dougaet var march'h an droug speret.

8

An dud oa ett d'an ofern-bret,  
Met ar vates yaouank, oajet  
Epken demeus a c'hwezek vloas ;  
Compenit er spont ag er c'las,

9

A d'oa bet Marianne Combot,  
Pa nem gaw Caër vel un den sot,  
Ken koleret ebars en ty,  
Ag hi c'hwelech'i traou dijuni.

10

Ne d'oa gwelc'het met skudel,  
Sioas pa deus ranket mervel,  
Creis labourat ag he yec'het,  
Caër neus bet 'he merzeriet.

11

Var a leur zy oa diskaret,  
Var he estomak n'oa pwezet,  
Boutet dezhi en he gwinou  
An torch vez c'hwelech'i skudellou.

12

E gouk troc'het gant eur gontel,  
Ar galon gris, barbar kruel,  
Kazi vel vez guillotinet  
En hor bro ar grimalet,

13

Goude n'oa gret ar vuntrerez  
Oa bet n'em lakat da laerez,  
Laeret tremen trizek-kant liour,  
Entre arc'hant, paper hag aour.

14

Neuze n'oa tennet, kristeinien,  
Ar c'hik-sall deumeus ar souben,  
Ous taol nem laket dijagrin,  
Da zebri a da eva gwin.

15

Evet kognak eus ar gwella,  
A neuze teuas da baka  
Ar c'hik-sall en eur mouchouar.  
Goude partias ar barbar.

16

Gret n'oa he fallagries,  
Ep beza gwelet, va zud kes,  
Taolet ar c'hik e neur wesen,  
Ar monstr bras, ar galon payen.

17

Met en deiz oa c'hrim komete,  
En eul' lannek oa bet gwelet  
Un den gwisket guis ar c'houare,  
Ag e oa bet sonjet neuze,

18

E oa bet Caër eur gwir bayen.  
Rag ganthan oa eur bakadem,  
Ag ar bakaden se, kredet,  
Oa ar c'hik-sall nevoa laeret.

19

Dre urz ar justis, ar pweltron  
So bet konduet d'ar prison,  
Raktal so bet anavezet  
Nevoa krimou all kometed,

20

20

Rag da daouzek a vis c'hwerveur,  
E oa bet c'hoas bras ar malheur,  
Ag ebars er mèmeus kontre,  
Ep ma oa declarer neuze

21

21

E nevoa bet Jean-Marie Caër,  
Ar galon da veza muntrer,  
Ne grede na koz na yaouank.  
Deklari Caër ar gwir dirant.

22

Sioas koulskoude, kristeinien,  
Caër a so bet tremen payen,  
En noz-se tri den n'oa lazet,  
Goude an tann varnho' laket,

23

Var dro seiz heur demeuz a noz,  
Raog oa ett an dud da repos,  
Bars e vilajen Konstansou,  
E neus bet gret Caër e grimou.

24

Famill Koëf oa o chom eno,  
Leac'h ma neus souffret ar maro,  
Ar mab, ar vam ag an tad,  
Lac'het o zri gant an ingrat.

25

Caër, raog mont d'ober he grimou,  
Ia ! da vilajen Konstansou,  
A oa bet e nem brepreat,  
A goulen digor neus bet gret.

26

Ar mab, allas, ne sonje ket,  
N'oa ar maro vithan prepreat,  
A zigoras an dorr da Caër.  
A kerkent neuze ar muntrer,

27

En asomas gant un taol bras,  
Friket e ben dezhan sioas,  
A François Koëff, dre drahison,  
So bet lac'het gant ar pweltron,

28

An tad ag ar vam evel-se,  
Neus bet ivez lazet neuze,  
A sioas goude, an dèn fall,  
Laket varnezh an tann gwall.

29

O ! pa pebeus tristidiges,  
Konsiderit oll va zut kes,  
Triiden lac'het gant an infam,  
Goude devet en kreis ar flamme.

30

Dre urz ar justis e zeo bet,  
Hosrelegou disenterret,  
O sonjal piket he galon  
Da Caër eus a gompassion,

30

Caër, pa welas ar relegou,  
A lavaras e berr gomzou :  
Me meus gwelet araog breman,  
Relegou tud c'hoas er bed-man.

31

Evelen neus bet laret ivez,  
Dirag kals a dud alies :  
Me lac'hfe ken kontant un den,  
Vel ma lac'hfen eur gaeillenen,

32

33

A neus bet james declareret  
He neus bet krimou kometet,  
Met kavet so preuvennou skler,  
Vit prouv eo bet eur gwir vuntrer.

34

Komprenit mad, oll Bretonet,  
Ar pez aman breman gleofet,  
A c'hui gredo, koz a yaouank,  
Eo bet Jean-Marie Caër tirant.

35

François Koëff a oa domestik,  
Gant a Léost, ty un den pinvidik.  
Er Velin-Soull oa meliner,  
Var dro daou c'chant pas deus ar gaërm.

36

Da loja e c'he avichou  
Da dy he dud, da Gontansou,  
A neuze e kasse ganthan  
Alc'hwechou eus ar velin man,

37

A da daouzek a viz c'hwerveur,  
En noz e oa bet gret ar maiheur,  
Koëff oa ett dar gaërm da loja,  
Ag alc'hwechou ar velin ganthan,

38

Ag ar re-man so bet kavet  
En ty muntrer p'eo bet furchet.  
A kals a breuennou all c'hoas,  
Vit prouv eo bet eur muntrer bras.

39

He vrugou so bet ives kavet  
A bars en he koufr, Bretonet,  
Ag he kargaet demeus a oad,  
Ag ar goad se kredit erfad,

40

Sioas oa goad ar plac'h yaouank,  
Oa bet lac'het gant an tirant,  
En dregont eus a vis ebrel,  
Er Velin-Soull, gant eur gontel.

41

Inaouet vefec'h, kristenien,  
Klevet diskleria pen da ben,  
Pegment a breuennou so  
Kavet var sujet ar c'hrimo.

42

Ar vam deus bet ives kuzet,  
An arc'hant noa he mab laeret  
Er Velin Soull e Miz Ebrel,  
Deklaret skler gant ar mevel,

43

A da dri demeus a vis du,  
Eo bet tremenet ar revu,  
Var grimou bras Jean-Marie Caër  
A galvet ives da Quimper.

44

Tri a daou ugent a destou,  
Vit festini eus ar c'hrimou,  
Gant Caër, dirag ar jureet,  
A destou fos oaint oll tretet.

45

A d'ar bemp deus ar memeus mis,  
En despet tha d'he oll valis,  
E presans kals a dud ar vro,  
Ar c'hour varnas Caër d'ar maro.

46

Ractal vel ma nevoa klevet  
He oa d'ar maro kris barnet,  
Ar monstr semplas, en tribunal,  
A ziskwel skler oa kriminal.

47

Jean-Marie Caër a oa kontant,  
Da lac'ha koz evel yaouank,  
Gant ne rank-je ket he c'hunant,  
Soufr goude an disterra poan.

48

Caër neus bet gret en he vuez,  
Nemet heuill hent ar fallentez,  
A dre eur maro an trista,  
E ranko kuitat ar bed-ma.

49

Un exempl eo demp kristenien,  
N'heuilomp ket buez ar payen,  
Bezomp honest var an douar,  
Ag e vemp kurunet a gloar.

FIN

*Propriété de l'auteur et tout droit réservé.*

**Louis LE BRUN.**

# KLEM MOU

## EUR PLAC'H MANKET

### VAR EUN TON TRIST

Selaouit breman ya mouez, va c'hamaradezet,  
 C'houi pere em yaouankis, a meus bet kals karet,  
 Eus a Doullie a Ludu, me ra deach' ma c'hemmou,  
 Deut holl assemblez gan-in, da veska ho daelou.

Me a meu[!] kolet breman va reputation,  
 Va chalon a zo karget ha zezolation,  
 Dre ma meus kredet, siouas, ya faoz kamaradou,  
 E meus kolet ar chaera demeus va bokejou.

Beteg breman me challe laret a vones huel,  
 E oan-kera famelen a oa e Breiz-Izel,  
 A breman me zo udur e tones an holl yerc'het,  
 Pa eo va ch'era bouket sioas gan-in kolet.

Henez oa kera tenzor e moa bars er bed-man,  
 Ne kavin ket henep leac'h, da brena seur dezan,  
 Dre veza deut da gredi camaradet treitor,  
 E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa deuan d'examina ar voul rond deus ar bed,  
 Sioas me vel varnezhi breman kals a verc'het  
 Pere zo kollet gante kouls a me ho rozen,  
 O veza deut da flout en comzou treitorien.

Va hol gerent zo sioas gan-in dizonoret,  
 Va chans a zo dinatur, va flaneden kollet,  
 Va chalon zo en irvoud, kouls en nos vel en de,  
 Me a choulen ar maro vit disken bars em be.

Goude ya fragilit, me zo holl ankeniet,  
 E compren bar er stad-trist, e pehini on rented,  
 Beteg breman me meus bet douget kokardeno,  
 Breman e'meus eur bisac'h, eur vas da vont en dro.

Beteg an oad ugant vloas, me a meus bet bevet  
 Ebars e doujians Doue, evel ma vez gleet,  
 Neuze me a oa karet gant an holl em chanton,  
 Neuze, kamaradezet, oa laouen va chalon.

Goude me meus bet henliet, kouls en noz vel en de,  
 Ar gwel kompagninez, a zo bars em c'ontre,  
 Dre se me zo mepriset, ebars en Breiz-Izel.  
 Va evrustet er bed-man, zo eet gand an avel.

Ne meus ket heuliet sioas, avis tad na mam,  
 Dre-se ne meus ket galiet beva ive divlam,  
 Greet a meus skouarn vouzard pa glevon anezhe,  
 Koulskoude deus bet laret ar wirionnez din-me.

Lavaret zo bet din-me gant he sur aliez,  
 E heul gwel kompagninez, mije tristidigez,  
 Mes dremaan c'hoas yaouank, veprisen ho c'homzou  
 A ze ra din-me breman skuil eur mor a zaelou.

Ma mije bet o c'hiredet, heuliet ho gourc'hemen,  
 Va buez, kamaradezet, e vije bet laouen,  
 Mes pa ne meus ket sentet breman demeus ar stur,  
 Allas vit deus ar garek, e rankin ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet.  
 Awichou me eun tam da zebri a gweach all ne me ket,  
 Goude ma ve erc'h a scorn, ha ienn bras an avel,  
 Keuneud ne mo ket d'ober tan d'a doma va buguel,

G'houi, va c'hamaradezet, goude va oll anken,  
 Deuio c'hoas d'am goapaad, gant eur galon laouen,  
 Mes mar kemerit an hent, en pehini zo danger,  
 C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouner.

Allas ! kamaradezet, daou hent zo er bed-man,  
 Anhini gerenan hent mad deus da zougen bec'h skan,  
 N'hep gemer an hini fall, bale war va roujou,  
 Deus eun pouner da zougen ha kals a dourmancho.

Vit war va chouck breman, a zo eur bec'h pouner,  
 Hag a meus deus e zouguen, kals a boan a miser.  
 Dalch'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou,  
 Adieu ta d'am yaouankis, ha d'am plijaduriou.

**Louis LE BRUN.**

(Propriété de l'Auteur).